

447

(342)

Güerz ar Martolod yaouanc Breton.

Doue oll-buissant, c'houi a lenn em c'halon,
 C'houi a gont va daelou, va huamadou don,
 Guelit hac estimit ar moment hac an hur
 Ma vo fin d'am poaniou ha d'am displijadur.

Daou vloas so tremenet, na gontan get ar rest,
 E voe ordrenet din ambarqi var rad Brest,
 Elec'h ma zoun brenâ hac e vin marteze
 Betec an deiz, allas ! m'echuo va bue.

Pa enruis el lestr, va soiez a voe bras,
 O velet ur c'hostel o vralla var dour glas;
 An aud evel ur c'helc'h a voa endro din-me.
 Dindannon voa ar mör, arziouc'h din voa an ée.

(343)

Begou hir ar guernou zo pelloc'h deus an dour
 Eguet deus ar vèret beg an huella tour;
 Gerdan bras ha bian, neuze ar ferroget
 A dreus var peb guernen e form croasion parfet.

Guelit oc'h eus mintin an dro d'ar raden glas,
 Euz croazet abep tu, coulz a hed hac a groas;
 Var ur vatimant so aliessoc'h corden
 Eguet a neuden zo endro d'ur radenen.

Pèvar ugent canon, daou-ugent abep tu,
 Stoufet gant liech guenn, o c'horf livet en du,
 Bombou ha ferrierou, fusuillou, mousqeton,
 A glêrem abep tu gen a zan va c'halon.

Doue oll-buissant, c'houi a lenn em c'halon,
 C'houi a gont va daelou, va huamadou don;
 Guelit hac estimit ar moment hac an hur
 Ma vo fin d'am poaniou ha d'am displijadur.

fin.

(Vol. IV, p. 342-343.)
 7 str. numérotées.

Cette "Güerz" provient du
 volume Güerz, par L. Dufilhol.